

Detaill

Var ar cholera - morbus

Ha var ar voyenou d'eq em goarantissa eus anezan,  
e gement ha ma zeo possubl.

(299, suite)

---

Ra vezo grêt, ô va Doue!  
hervez ho polontez santel.....

---

Var ton Ar Plac'h libertin.

Habitantet a Vreiz, tostait, me ho ped,  
Da glêvet euy detaill a rent calz glacharet,  
Var sujet eur c'hlenved bras a zo o ren e Paris,  
Pini, en bêr amzer, a ro eur maro cris.

Marteze e zeus darn a deuzo d'am tamal  
Balamour d'ar sujet a laqan da rimal;  
Ne meus neb intantion nemet dont d'ho gentellia  
Da bellât diouzoc'h eur maleur ar goassa.

(300)

Gendrec'het oun, certen, fra vez un dra rimet,  
E teu calz êzetoc'h d'antren en hon speret,  
Ha dre ma zeo va matier, allas! mad da studia,  
En e brezantân d'ec'h, me gred, vit ar giella.

Clêvet oc'h eus oll comz eus calz a glenvejou  
Pere, siouas, zo caus eus nombr a valeurion?  
Hac a zo, a dra certen, infinimant goal euzus;  
Mes terruploc'h eo c'hoas ar C'holera - Morbus.

Ar goalen - mâ 'gastis zo deut eus ar Indes,  
Hac a zo n'em dolet dre 'r bed a bep costez;  
Goude beza ravajet hac ar Pers hac ar Turki,  
E deus grêt dommach bras er Pologn, er Russi.

Goude beza douguet an desolation

(301) Partout dre an Egypt, hac ar brassa spouron,  
E tistruch calz e Bro-Sauz en eur feçon meurbed cris.  
Ha ceta-hi brema o ren e qer Paris!

Direded eo ivez, casi incontinant  
Ar c'holera ebarz meur a zepartamant.  
O Franç! ô va mam-brô quer! ha te avez reduizet  
Da vezza er vech-mâ chenchet en ur vèret!!!...

Na ouffet get nombri an dud en deuz layet;  
Mes gouzout a r'er zo eun niver bras meurbed.  
Ar dud yaouanq, ar re gôs, ar paour hac ar pinvidic,  
Oll e zint distrujet dre 'z goalez reuzudic.

Ar gouarnamant Franç, pell zo oc'h evessa  
Peur e teuje 'r c'hlenved er vro d'en em renta,  
En devez bet gemeret an oll musulou credet  
A vije bet capabl d'hor beza prezerret.

Mes penos, va Doue! dont da viret an den  
Ouz un dra a zo trec'h d'an oll pouoer humen!  
Ne zeus nep seurt puissanq, nac an nerz eus hoq armo  
Capabl d'en arretri.... Dorn Doue zo eno!....

(302) Gouscoude na dle den en em disesperi  
Balamour d'eur maleur qer cruel ha qer cri;  
Mes sonjomp penos Doue a lavar deomp ato:  
« En em zicourit oll, ha me ho sicouris. »

P'eo güir ar voalen-mâ a ellet donet e Breiz,  
Credet, va mignonet, hac heuillit gant güir feiz,  
Ar c'hentellion a rôer d'ec'h amâ da vedita:  
Erit ho sureté e scrifañ qement-mâ.

An Instruction-mâ a zo recommandet  
Dre un decision eus a vedecinet;  
Rac-se ta studiit-hi, coulz hac hoc'h amezeyen,  
Ha disqit-hi d'an oll dre abep seurt moyen.

Pequen coupabl evec'h, ma ve dre negliganq  
E teufe ar c'hlenved bars en ho temeuranq,

6

P' en hini hoc'h amezec ! rac-se laqit eves mad  
Da zont e peb feçon da dachout e bellât .

Fêzon d'en em brezevri diouc'h a[?] c'holera .

Ret eo , dre bep moyen , miret ar broprete  
Varnoc'h-hu hoc'h-unan hac en ho ty ive ;  
Istre m'eo ze qelennet balamour d'ar c'hleñved-mâ ,  
Ze a zo eur vertus demeus ar re guenta .

Laqit oll eves mad eus a bep yenien ,  
Hac en em dalc'hit tom e peb amzer a rên ;  
Dreist oll , tachit da zouguen var ho cōf ur c'houris gloan ;  
Chossonneyer mezer adle caout peb-unan .

(303)

En nep occasion na dleit qet posi  
Ho treid noas var ar vein , nac ive var ar pri ;  
Qement-se 'alfe rei d'êc'h marteze eur yenien  
A ve noazus terrubl en ho ty da bep den .

Arichou en em gar oblijet meur a zen  
Da veza e plaçou a zo humid ha yen ;  
Newze etleont douguen , evit en em gaout ervad ,  
Hep faut eur galochou p'autramant boutou coad .

Pa zoar bars er gouele , arabat ve digor ,  
Etre ma pad an nôs , na prēmestou , na dor :  
Ret ezê da bep-unan beza abred mad er quër ,  
Rac aoun d'ar yenien hac humidite 'n êr .

Muia ma vo possibl , e zeo ret evita  
Peb labour divoder , rac se ne dal netra ;  
Ha neus cās e pez amzer , pe en ân , pe er gouân ,  
Na dleer qet james en em visca re scân .

Ar sobrentez ivez a zo recommandet ,  
E peb tra gant soign vras e zeo ret e miret ;  
Rac-se , ebars an debri couly hac ebars en eva  
Na dleer gemer re james eus a nep tra .

(304)

Obser ret e zeus bet penos ar vestrierien ,  
Hac an dud debauchet zo attoqet souden

Eus ar c'hlenved mortel-mâ ; rac-se eta, hep excus,  
Renoncit oll a grenn da viçou ger mezus.

Un dra vad eo ive bepret en em vaga  
Eus a zouben ar c'hig, poazet mad, dreist peb tria ;  
Ar c'hig fresq zo ivez mad ; mes atao ar c'hig sallet  
A dheer da zifen, muia ma vez allet.

Eus a bouzon, froieuz criz, eo ret en em absten,  
Ha dreist oll, pa c'huezer, eus a bep breuvach yen ;  
Gementse zo dangerus : laqit en ur p'intad dour  
Ul lojad giin-ardant pe giin rus d'ho sicour.

An abus bras a r'er eus al liqueurieu ere  
Zo ivez dangerus, gout avoalc'h a r'er ze ;  
Na giin quenn, na giin-ardant var yun na dheer eva,  
Nemet goude ma vez debret un tam bara.

(305) D'ar bièr ha d'ar gist eo ret renonç a grenn,  
D'ar dour-mel, piqettez, ivez d'ar jambezen,  
Pere na vez get berrit avoalc'h vit beza yac'hus,  
Pe dre beza grêt fall 'elfe beza noazus.

Peb den subitamant n'em santfe attaqet  
Eus eur seurt poan bouzar en eur membr benaqet,  
Eus a eur boummerder-glêo, pe a zebezadurez,  
A dle galv medicin bars en instant memes.

Memes tra 'rêi ivez, mar sant eur hoaz benac  
Ebars en e heultrin, pe tân en estomac,  
Pe autramant ar drouc-côf, e zeo ret quelvel souden  
Ar medicin tosta evit sicour an den.

Mes grit attention e zeo incontinant  
E renqer mont d'e glasq, hep dale ur momant,  
Rac an disterra retard a laqfec'h en gementse,  
A elle beza caus d'e varo, marterze.

Da c'hortos ma teuço ar medicin d'ar ty,  
E t'ho an den clâm en e voele c'hoezi,  
Hac evit e excita, e rango buan eva

Tizan tom, compozet eus al louzaou - mâ :

Gemerit deillou bentel ebars en tosta qêr,  
Hac eus ar re tilheun, e ty<sup>7</sup>η apotiqer;  
Gant an dra - ze e refot e dizan d'an hini clân,  
Hac er refot d'eva tom ha buan dezân.

(306)

Continuit gant soign d'en delc'het bepret tom  
Ebars en e voele, ze a zo goal ezom;  
Dalc'hit-ân dastumet mad ebars tapisson gloan,  
Rac aoun e teufe riou an disterra dezân.

En hoc'h interest oll e recomander c'hoas,  
Hirio an deiz memes ouспен equet biscoas,  
Da bellât ouz ho tyez an dour brein, an teil ive,  
Trianu capabl da denna ar c'hlenved er c'hontre.

Conseilli a rêr d'êc'h nonpas en em sponta  
Gant an aoun da drapout ar c'hlenved horrupl - mâ;  
Rac-se, vel en ordinal, grit pepini ho tever,  
Ha laqit ho fizianç ebars en hon Zalver.

Dioriallit ive mad na deufec'h da gavet  
Ebars er memes cambr re a dud da gousqet;  
Qergent ma vezot quisqet, digorit ar prênestou,  
Bep mintin, hep mancout, couly hac an dorjoû.

Ouspen, eo commandet delc'hel en eur pod pri  
Dour chloruret atao gant soign ebars pep ty;  
An dra - ze a vez cavet e ty<sup>7</sup>η apotigerien,  
Pere a zisqo d'êc'h en implija souden.

(307)

Mad ve nonpas varnoc'h serri 'r goualeyou clos  
Nac ive 'r ridojou, pa zeit da repos,  
Na lezel nep loustoni er podou e nep amze,  
Mes o rinça qergent gant eur banne dour sclêr.

Pellât ouz ho ty an toullou fôs bepret,  
An dour - scot bars ermêz a dle beza stlapet;  
Goualc'hi gouier ar prênestou zo oll triaou mad da ober;  
Anfin, ar broprete dreist oll zo necesser.

Maga loëned en tij zo bepret un dra fall,  
 Ne aller qet james donet re da damal;  
 En em discret irez eus al loëned hep ezom,  
 Rac dangerus bras eo beza gantê o chom.

Angaji a rër c'hoas dont d'en em bourvei  
 A riz, heiz, bleud moutard, hac a gampkr e peb tij;  
 Eur houarn da repassi, eur vigen a zo necesser  
 Erit tomma an treid, pa vez ret en ober.

(308) Ceta meur a voyen vit en em breservi  
 Deus ar c'hlenved horrupt, mar tosta deus ho tij;  
 Mes hon guella medicin eo certenamant Doue,  
 Rac-se lagomp ennân hor c'honfians bemde.

Pellaomp ouzomp oll peb seurt dissantion,  
 Beromp evel breudeur ebars en union;  
 N'hor bez nep ambition nemet da garout Jesus,  
 Evel guir gristenier ha bugale eürus.

Mes, mar fell deomp hirio meritout e c'hraçou,  
 Sicouromp ar beorien en o ll ezomou;  
 En em ampessomp buan da zonet d'o zoulaji,  
 Hervez hor moyenou ha fortun pep-hini.

Re bell a zo, siouaz, hon eus calz negliget  
 Maximou sacr ar feiz, bemdez deomp prezequet;  
 Deomp hirio, leun a firzians dirac treid an auterion  
 D'obten misericord eus abers hon Autrou.

Recommandet zo deomp, dre vouez hor pastoret,  
 Da adressi hep cess hor vœu da Vestr ar bed;  
 En em hastomp - ta buan, bars en hor c'halamite,  
 Da keuil o c'hentellion hac en nos hac en de.

(309) En em unanomp oll a galon, a speret,  
 D'implori gant guir feiz, hirio Salver ar bed;  
 En em strincomp assambles, var breudeur, var hon daoulin,  
 Da c'houl misericord digant hor Mestr divin.

Gouzout a reomp oll eo hor pec'hejou bras,

Mes e visericord a zo calz brassoc'h c'hoas;  
 Rac-se-ta, gant ~~guit~~ ~~fizians~~ ni 'nem dol en hoc'h asgre  
 Epelec'h hep mui gen e zeus deomp surete.

Doue a vadelez, roit deomp an esperans  
 Da velet ar yec'hed souden o ren er Franç!  
 Sellit ouz ho fugale, mantret oll gant ar glac'har,  
 Ha rentit ar bonneur dre oll var an douar. fin.

Ebrel 1832. A. Lédan.

Nota. An Autrou Souvestre, De la Villemarqué, ha de Courcy, en  
 Paris, en eur gomz deus ar voërez-mâ en o letrioù, o deus comzet faus,  
 me en attest va bultin ha va c'hayerou er prou. An autrou Miorcec-  
 Kédanet, eus a Lesneven, en deveus laget al lizeren guenta K eus e  
 hano, e buez Sant Breiz da ur c'houpled eus va guery var ar guern,  
 e mis geryu 1833. Gementse ne des get leal. A. Lédan. An Autrou  
 Maout eus a Sant Brieç en deus attribuet faussamant da Yañ ar  
 Guen, va guery var ar c'habiten Cozanet. En dislavaret à meus, emis  
 mae 1842.

( Vol. VI, p. 299-309.)  
 49 str. numérotées.